

Dornskridoù Milin: Kanaouennoù

6. MARKIZ GWERRAND - AL LEUR NEVE

iez Treger

Na kloarek Lambaul a /vonjoure/° ° a-us : lavare
e ti Fieka /Kroac'halle/° pa errue ° a-us : Kalve
-/he bonjour/°;(ha)joa barz en ti-man, ° a-us: de mad
Fieka Kroac'halle pa ne gwelann.
Peleac'h 'ma Fieka Kroac'halle
evit dont ganen d'al leur neve.
- evit d'al leur neve ne daio ket
Rak markiz Gwerrand deuz he gourdrouzet.
- dont a rai ganen d'al leur neve,
m'he deve drouk m'em bo ive.
Markiz Gwerrand a c'houlenne
dioc'h ar veserien barz er mene:
- meserien, d'in-me leveret
n'hoc'h euz ket gwelet ar c'hloarek.
- eo eat duze dal leur neve
Fiek Kroac'halle oc'h he goste,
Brava daou zen vo el leur neve.
ha markiz Gwerrand a c'houlenne
barz el leur neve pa errue :
- he bonjour ha joa barz el leur-man
Kloarek Lambaul pa n'her gwelann.
- 'Ma ahont e korn al leur neve
Fieka Groac'halle oc'h he goste.
Markiz gwerrand a /vonjoure/° ° a-us : lavare
d'Kloarek Lambaul eno neuze :
- Kaeroc'h eo da zillad, herve ar c'hiz,
/evit ma c'he° va hini/ ha me markiz ° a-us : re
- Na mar doun enn habit kaer man gwisket
ar c'horf man en deuz hen gounezet.
sarret oa da ialc'h pa oa paet
ha va hini-me a oa digoret.
Lez brema, Markiz, da ziskouriou
vit ma komansomp ar gourenou.
- vit da c'houren did-te ne d-inn ket
paotr kalet oud am eus klevet
da c'hoari ar c'hleze ne larann ket.
N'oa ket he c'her peurlavaret
triqueac'h kleze noaz zo dic'houinet,
hini ar markiz zo ann naontekvet.
Kloarek Lambaul enn dro a ruille
kemend den a oa el leur neve,
difen he zous koant diouz he goste.

Markiz Gwerrand a lavare

da Gloarek Lambaul eno neuze :

- Taol da gleze brema d'ann traou
ni (a) vo mignonned hon daou.

Kloarek Lambaul 'oa eunn den klouar

a daolaz he gleze d'ann douar.

N'oa ket he gleze d'ann douar peurdaolet

Triouac'h kleze noaz zo dic'houinet,

hini ar markiz zo naontekvet.

Markiz Gwerrand a lavare

da Fieka Kroac'halle eno neuze :

daoust eo did /pe/° vervel /brema/ patant °a-us: te

pe dont ganen-me da Werrand.

- Gwell eo ganen mervel brema

p'eo maro ann hini 'garien muia.

Tud al leur neve a lavare

da varkiz Gwerrand eno neuze :

- Markiz Gwerrand, fall hoc'h eus gret

dispartia daou zen a eured.

Doue ra bardonno ann anaoun,

'maint ho daou war ar vaskaon

eat int d'ober ho feoc'h gant Doue

/Doue/° ra vezo gant ho ene. °a-us : peoc'h
